

Kantikou

CANTIC SANTEZ ANNA Vened

Var eun ton ancien

Me o supli, tud devot da zelaou a galon
Eur c'hantic spirituel gant guir devotion,
A zo grêt enn gloar Doue hag e Vam ar Verc'hes,
D'an itron Santez-Anna, hom guir advocatez.

Mes kent avañ davantach, goulennomp ouz Doue
Ar zicour, an assistañ, sclerijen euz an év.
Dre intercession ar Verc'hes hag ar Spered-Santel,
Da gomposi eur c'hantic da gana enn Breiz-Izel.

Me a gomz a eur plac santel hag ancien meurbet
Frekant a bep kontre gant an dud affiget;
A Leon hag a Dreguer, a Guerne, a Goenet,
A bevar c'horn ar broviñ e teu pelerinet.

Pebes douter a zanter, hag ive pebes joa.
Pa vel ar belerinet illis Santez Anna!
Ankourachiet e souden ezomou ha scuider,
Ne zojer mui eus souffret, na tourmant na miser.

Oe'h antreallien illis, pebes contantamant,
A zant eun en he c'hichen eno en eun instant;
O itron Santez Anna! emea, a greiz ca'on
Me en em brostern d'ho treid gant guir devotion.

Sellit en dro d'an illis eun niver tolennoù
Offret da zantez Anna en faveur ar voayenn
Gret er moment an danger, hag a zo exoet
Dre c'haloud Mam ar Verc'hes e pevar c'horn ar bed.

Dezir a meus Bretonnet, da siscleria brema
Ar miracloù admirabl a ra Santez Anna;
En escopti a Voened, tostic da guêr Alre,
E man tensor precius d'hon c'horf a d'hon ene.

Jeanned ar Bescont hanvet, a escopti Goened
Espac demeus a zeis vloas priwet d'eus ar c'herset,
En em guestas gant fiziañ ha guir devotion
Da vont da Zantez Anna euz a greiz e c'halon.

Kasset voa en eul letier gant daou den assistet,
Rentet en Santez-Anna pa e doa desirét;
Evel ma yas en illis, dirag Santez Anna,
E kuitas e branelloù, ma zavas en he za.

Divale a ras d'ar guêr hep den d'he asista,
E branelloù a lezas dirag Santez Anna,
E maint c'hias en illis peb den ell o guele;
Meulet ra vézo Jesus hag e Vam beniguet.

Mac'harit Costion ive, a guichen Quimperle
Zo bet pell bras languissant chomet var e guele;
Mes e zad e brometas eviti eun novet,
En illis Santez Anna, me devize iec'het.

Var ben daou zeves goude ar plac'h-mâ a zavevas.
Adniomb oll, christenien, eur miracl zo ker bras
E deus grêt Santez Anna en kichen Quimperle,
En andret eur plac'h yaouank e fode nôs ha de.

A Vrest, eur soudard devot, e ano Sant Amnda,
O tremen ebars eur c'head en em gavas gantan
Pevar forban debordet var an hent o laeres,
Hac a c'houlennas outañ e yalc'h pe e vuez.

Ar soudard, pa o c'hlevas, a lavaras dezo:
Me a zo eun tremeniat, ne meus quet a vadon,
Hac a ya da bardonna da Santez Anna Voened,
Mar be madeles Doue va lézel en yec'het.

Ar mestr demeus a laeron a sistroas outa
Gant ar vistolen korguet, en esper de laza;
Evel ma sonjas tenna, e vrec'h outa zonnas,
Ar vistolen euz e zorn d'an douar a goezas.

An tri laer all pa veljont voa brec'h o mestr zonnol,
A c'houlenn out ar zoudard hac en doa e sorcet,
Salocroas sur, emean, n'en d'on quet eur sorcer,
Jesus ha Santez Anna am preserv diouls meler.

Eus ar guêr Rostrenen, eur miliper yaouank
Poa ho lemma e villin et foras ar palanc
Ma chomas entre daou ven, ma sonjet voa lazet
An itron Santez Anna e deus en preservet.

Diouls ar mintin pa zave ha pa ze da gouquet,
E pede Santez-Anna gant eur galon barlet,
D'he breservi diouls meler ha goal chang er bed-mâ,
Choaset en devoa da vam itron Santez-Anna.

Mari ar Pension hanvet, euz e guer a Alre,
En pad eus a c'hlec'h devez e poan a vugale,
Gant e fried voe goestlet dirag Santez Anna,
Neuse, souden e c'hentas eur mab ha vaillant.

Hac eur vaguerez yaouank, o vag eur c'hrouadur
Da eur bourc'his a Naouet, comprenit ar marleur!
Eun devez o sortil allas! ne sonje quet
Ma lezas ar c'hrouadur en e gavel kousquet.

O Pebes trislidigues, glac'hir, spont hac horrer!
Pa zistro ar vaguerez da zig'rrit he dor,
Pa zellas ouz ar c'havel ar c'hrouadur vor enna,
Contammet gant eur pennoh an anter anean.

Ha hi commanc da grial itron Santez-Anna,
Petra deus da ober? monkont a ra sémpla,
Alla! me a vel patant e vin sur punisset
Balamour d'ar c'hrouadur a zo ganen maguet.

Ar bourc'his, quenta glevas, a lacq e c'hemeret,
Rentet e memes amzer er prison a Noanet,
Souden voe groet e froces vi bed punisset
An itron Santez Anna e deus hi preservet.

Lennet e voa dirazi gant rigor ar setañ;
Conduet gant ar bourreo da guichen ar potañ,
Ha pignet e voa gantan betec ar vas huella,
Eno ec'h apparissas neuze Santez Anna.

Courach, emezi va merc'h, n'ho pezo drouc ebet ;
Ar c'hrouadur a zo yac'h, en e gawel cousquet ;
Me a zo Santez-Anna, ho gwiad yocadez ;
A boe an oad a zeiz klas em pedec'h alies.

Ar bourc'his má pa glévas voa e vab ressuscitet,
A gommenças da grial evel eun den follet ;
En em strincas d'an daoulin evit goulén pardon
Ous Doue ha Santez Anna eus a greiz e galon.

Me é an den miserabl ha na veritan quet
Bez' amá en ho presanc d'an daoulin prosternet ;
Me rai aman enorabl en plaç ar vagueréz,
Hac a c'houlénno pardon eus va fallagries,

Ar bourc'his a yas neuz da Ty eun orfever
Laquat ober en arc'hañt form e groudus quer
Evit digac en offrac da illis Santez-Anna
A weler c'hoas an tensor en heur eus a vrema

Ha Catel a bris hanvel, eus ar guer a Henbond
A goeas bars ar rivier, ma yas dindan ar pont ;
Gant an dour he voa ruilet, ha ma yas dindanna
Na bemzeg heur horolac'h abars dont aneze.

E mab, quenta ma glévas e voa e vam koel,
D'an itron Santez-Anna ganta e voe goestlet
Demeus a dregont d'iper, eun oferen novet ;
Ha dre c'hras Santez-Anna ne devoe drouc ebet.

Eur vatimant marc'hadour, o listrel a Yourdel
Forcet dre eur bar tourmant, tolet var eur rohel
Hac e voe etre'n daou dour ar spac a dri devez ;
Ma sonje ar vartolodet e coljent o buez.

Ar c'habiten skuizet bras hac e vartolodet
Rezolvot oll da vervel euz a greiz ho yec'het,
En em stric'ont d'an daoulin da grial da oela
Ouz en em recommandi d'hor mam Santez-Anna.

Abars eur c'hart heur goude ober e oréson
D'an itron Santez-Anna eus a greiz ho c'haron
Ar mor ouz en em zével, al lestr kerquent retet,
Dre eur miracl ar brassa e rivier a Naonet.

Eur vatimant perisset bars e creiz ar mor don
An equipach oll beuzet, exceptet ar patron,
Pehini var eur planquen a chomas sez devez
Mes dre c'hras Santez-Anna e zovetas e vuez.

Da illis Santez-Anna e roas e bresant
Ar sôm demeus a vil scoët, eur ga on en arc'hañt
Ac ouспен ze eun dantlen guernisset eus a aour
Ha pévar guénec varnuguent a-roas da bep paour.

Incapabl on, christienien, da ziscleria brema
An nombr eus a miraglou a ra Santez-Anna
Var ar mor, var an douar, e quement plac m'e feder
Suplia ra Jesus da bardon d'ar pec'het.

Santez-Anna ro c'enten ar gulet da re dal,
Ha d'ar re vud ar parlant, clévet d'ar re voutar
Remed d'ar re affiget, dar re gam a c'herzel
Soulañ d'ar vugalegou, ha d'an dud clan yec'het.

Amá e ma eur fanteu eus ar c'heacou Doue
A récour yec'het d'ar c'hor ha boe d'an ene
O tont da gôves enni ha da communia
D'an deizion a zo choazet evit e bizita.

Bep meurs quenta eus a mis e kaner an ofiç
En illis Santez-Anna, ouспен ar sacrific,
Evit consolation an oll pelerinet
A den da Santez-Anna gant eur galon parfet.

Ar c'hoec'hvet deiz varnoguén deméus ar vis gueren
Ema gomp Santez-Anna hac ar solennite
Gant ar Pab e zeus enni en deiz-ze, accordet
An induljançou plenier, remission d'ar pec'het.

Dou benac a gôvessayo hac a gommunio
En illis Santez-Anna, an deiz ze, a c'honeo
Pe gant devez a pardon, o tont da lavaret
Pemb Pater ha pemb Ave, recita eur chapelet,

O Itron Santez Anna ! ni o suppli hag o ped
Pedet e idomp Jesus en pales an Drinet
Evit goude hor mâr, ma zaimp oll da repos
Gant ar zent hag an aëles en gloar ar barados.

A dost da Santez-Anna, sonjit, o christienien !
E zeus eur plac a c'hrac har hanvet Parc ar Verzerien
O quilat Santez-Anna ho quem troet d'an illis
Lavarit a greis calon : Pater, Deprofundis.

*Pedennou hag Onesonou a gle ar Cristienien da lavarar
pere a zoug devotion da Santez-Anna*

Ho pezit sonj a Santez Anna, Mam, a consolation
penos ne voe clévet biscoas den o lavaret e vije bet
dilezet n'a refuset, ma tenje en affliction d'ho c'h
invog
ha d'ho pedi ar galon touchant ha penitant en deven
bet recours d'êc'h hac en deus goulennet ho c'h assis
tanç. Ho pedennou a den da vesa exocet gant hor Zalver
Jesus Christ ; rae se e kemeromp esperance n'oc'h evel
a ra an dud clanv pere a deu d'ho pisita. N'ien em adres
dêc'h eus a greiz hor chalonnou hac ho reclamomp
humblament. Accordit d'emp ar c'hrac da ellout eur
vech jouissa euz ar gloar eternal. Amen.

*Quement guêch, ma lavarfet an Orézon a zo ama varlerc'h
e c'honfet tregont mil blo's a bardon, accordet gant an
Tad Santel ar Pab Alexandr, da quement christien a
zo er bed.*

Ave maria, gracia plena, Dominus tecum, tua gratia
sit mecum : benedicta tu in mulieribus et benedicta sis
sancta Anna, mater tua, ev qua sine macula et peccato
processisti, Virgo Maria : exte autem natus est Jesus
Christus, Filius Dei vivi. Amen.

REDEN

Doue oll-galoudus hag eternal, c'hui pehini oc'h eus
deurvezetrei santez-Anna eurus evit Mam da Vam ho
Mab unic, grit, ni ho suppli, en eur enori e memori
dre eun devotion fidel, ma obtenimp dre e meriton ar
boneur fidel, ma obtenimp dre e meriton ar boneur eus
ar vuez eternal, o c'hui pehini a ren e pad an oll amze-
riou.

FIN.

(Propriété)